

Le mois
de mai
2025
à la
médiathèque-
ludothèque
de Gourin



Miz
Mae
2025
e mediaoueg-
c'hoariaoueg
Gourin

À L'AGENDA

EN DEIZIATAER



Animations Vivre-ensemble

La médiathèque-ludothèque de Gourin vous propose un mois sous le signe des solidarités. Découvrez le programme ! 📌

Journée nationale des Mémoires de la traite, de l'esclavage et de leurs abolitions

➡ 14h : visionnage d'un film suivi d'un temps d'échanges

Découverte de l'alphabet en braille et en langue des signes

➡ 10h30

10/05

14/05

Abadennoù Bevañ-asambles

Ar c'hengred a vo danvez ar mizvezh e mediaoueg-c'hoariaoueg Gourin. Sellit ouzh programm 📌

Devezh broadel Memorioù ar morianeta, ar sklaverezh hag an torridigezh anezho

➡ da 2e : sellet ouzh ur film ha pennad-kaoz goude

Dizoleiñ lizherennegoù ar skritur Braille ha yezh ar sinoù

➡ da 10e30

~~~~~  
Actions de sensibilisation  
au tri sélectif et à la  
protection de  
l'environnement  
➡ 10h30 : Ateliers ludiques  
: "Notre monde durable"  
➡ 14h-15h ou 15h-16h :  
Atelier "Création de marque-  
pages récup" par Maureen  
Babin, Chargée de mission  
prévention/tri des déchets à  
Roi Morvan Communauté  
~~~~~

Sensibilisation aux outils
pour les publics malvoyants
➡ 10h : Conférence de
l'association Les Chiens
Guides D'Aveugles du
Morbihan
➡ 14h30 : Conférence de
l'écrivaine Marie Antoinette
: "Exercer le métier de
romancière malgré le
handicap : tous les outils
pour aider les publics
malvoyants"
~~~~~

Ateliers ludiques sur  
l'inclusion sociale  
➡ 11h

21/05

24/05

28/05

Kizidikaat d'an diveskañ  
diuzel al lastez ha gwareziñ  
an en-dro  
➡ da 10e30 : C'hoarioù "Hor  
bed padus"  
➡ 2e-3e pe 3e-4e :  
"Fardañ merkoù-pajenn diwar  
danvez adtapet", kaset gant  
Maureen Babin, Karget a  
gefridi dizarbenn/diveskañ e  
Roue Morvan Kumuniezh

~~~~~  
Kizidikaat d'ar binvioù evit
an dud fall o gweled
➡ da 10e : Prezegenn ar
gevredigezh Chas-heñchañ ar
Mor-Bihan
➡ da 2e30 : Prezegenn ar
skrivagnerez Marie
Antoinette : "Bezañ
romantourez a-vicher daoust
d'an namm : an holl vinvioù
evit skoazell an dud fall o
gweled"
~~~~~

C'hoarioù diwar-benn an  
enlakaat sokial  
➡ da 11e

## Lecture de kamishibaï

Les jeunes du groupe  
kamishibaï de l'IME  
de Carhaix ont créé  
une nouvelle  
histoire en  
kamishibaï et se  
font une joie de la  
présenter au public.  
Rendez-vous le  
mercredi 28 mai à  
14h30 à la  
médiathèque-  
ludothèque de Gourin  
!



## Lennadenn kamishibaï

Krouet ez eus un  
istor nevez e stumm  
ur c'hamishibaï gant  
re yaouank strollad  
kamishibaï EMD Karaez  
ha laouen e vint o  
kinnig anezhi dirak  
an dud.  
A-benn ar Merc'her 28  
a viz Mae da 2e30 e  
mediaoueg-  
c'hoariaoueg Gourin !

## Vente de livres

La vente de livres se poursuit à la médiathèque-ludothèque municipale !

Tout à 1€ !



En savoir plus  
Evit gouzout hiroc'h

## Gwerzh levrioù

Levrioù a zo e gwerzh atav er vediaoueg-c'hoariaoueg-kêr !

1€ pep tra !

## ANIMATIONS REGULIERES

## EMGAVIOÙ A VEZ INGAL

### Club manga

Le club manga se réunira les samedis 17 et 24 mai, toujours à 10h !



### Kleub manga

En em vodañ a raio ar c'hleub manga d'ar Sadorn 17 ha 24 a viz Mae, da 10e atav !

## ACTU

## KELEIER

### Prix Facile à Lire

Les huit ouvrages du Prix Régional Facile à Lire 2025 vous attendent à la médiathèque-ludothèque de Gourin.

Vous avez jusqu'au mois de juin pour voter pour votre livre préféré !



En savoir plus  
Evit gouzout hiroc'h

### Priz Aes Da Lenn

Emañ eizh levr ar Priz-rannvro Aes Da Lenn 2025 ouzh ho kortoz e mediaoueg-c'hoariaoueg Gourin.

Betek miz Even e c'hellit votiñ evit ho levr muiañ-karet !

## Sondage !

Que souhaiteriez-vous trouver à la médiathèque-ludothèque municipale autour du breton ? Nous mettons à votre disposition une boîte à suggestions pour recueillir votre avis. N'hésitez pas à contribuer !



## Sontadeg !

Petra a fellfe deoc'h kavout tro-dro d'ar brezhoneg er vediaoueg-c'hoariaoueg-kêr ? Ur voest soñjoù zo bet lakaet, deoc'h da reiñ hoc'h ali. Deuet mat e vo ho mennozhioù !

## DU RÉSEAU



## AR ROUEDAD

## Ciné'mai

Le Ciné'mai a pour thème cette année "Les espions". Répondez au quiz et gagnez de nombreux lots !

Les questionnaires sont à retirer chez tous les partenaires de l'événement : dans les cinémas de Gourin, de Guéméné-sur-Scorff, du Faouët et les médiathèques du réseau Gwezenn et de Roudouallec.

Du 1er au 31 mai 2025



En savoir plus  
Évit gouzout hiroc'h

## Sine'mae

"Ar spierien" eo tem ar Sine'mae ar bloaz-mañ. Respontit d'ar c'hwiz, profoù zo da gaout !

Kavet e vo ar goulennaouegoù en holl lec'hioù keveler : e sinemaoù Gourin, Ar Gemene, Ar Faoued hag e mediaouegoù ar rouedad Gwezenn ha Roudouallec.

Eus ar 1añ d'an 31 a viz Mae 2025

## Raok an hañv

Le réseau Gwezenn participe pour la deuxième année consécutive à Raok an hañv entre le 10 mai et le 15 juin 2025, en proposant diverses animations, en breton, dans les communes du réseau.

Au programme :  
balades chantées,  
projections, jeux en breton !



En savoir plus  
Evit gouzout hiroc'h

## Raok an hañv


Kemer a ra perzh ar rouedad Gwezenn e Raok an hañv evit an eil bloavezh diouzh renk. Etre an 10 a viz Mae hag ar 15 a viz Even 2025 e vo kinniget abadennoù liesseurt e brezhoneg e kumunioù ar rouedad.

Baleadennoù kanet,  
filmoù, c'hoarioù e brezhoneg zo er programm !

## Prix Gwezenn

Les 10 livres en compétition pour le premier prix des lectrices et lecteurs du réseau Gwezenn sont empruntables dans les médiathèques-ludothèques. Lisez ceux que vous souhaitez et donnez votre avis pour élire le premier livre préféré du réseau !

Jusqu'au 22 septembre 2025



En savoir plus  
Evit gouzout hiroc'h

## Priz Gwezenn

Emañ an 10 levr a zo war ar renk evit priz kentañ lennerien ha lennerezed ar rouedad Gwezenn da amprestañ er mediaouegoù-c'hoariaouegoù. Lennit ar re a fell deoc'h e-touez al levrioù-se ha roit hoc'h ali evit dilenn levr muiañ-karet ar rouedad evit ar wech kentañ !

Betek an 22 a viz Gwengolo 2025

## Exposition mascotte

La mascotte du réseau Gwezenn a inspiré de nombreux artistes locaux.

Venez admirer leurs créations dans les



## Diskouezadeg maskotenn

Awenet ez eus bet un toullad arזורien.ezed eus ar vro gant maskotenn ar rouedad Gwezenn. Deuit da arvestiñ ouzh o oberennoù e

médiathèques du  
réseau au fil de  
l'exposition  
itinérante et bientôt  
à Gourin !

En savoir plus  
Evit gouzout hiroc'h

pep mediaoueg eus ar  
rouedad da-geñver an  
diskouezadeg-vale.  
A-benn nebeut e  
Gourin !

## A VENIR...

## DA ZONT...

### Lectures avec Poupig

Histoires et  
comptines pour les  
tout-petits jusqu'à 3  
ans et leurs parents

⚠ Les Lectures avec  
Poupig auront lieu le  
mercredi matin  
dorénavant.

Rendez-vous le 4 juin  
à 10h !



### Lenn gant Poupig


Kontañ istorioù ha  
rimodelloù evit ar  
vugaligoù betek 3  
bloaz hag o c'herent

⚠ D'ar Merc'her  
vintin e vo dalc'het  
an abadennoù Lenn  
gant Poupig  
hiviziken.

A-benn ar 4 a viz  
Even da 10e !

### La Bretagne : paysages et culture

Que diriez-vous d'une  
balade en Bretagne  
avant l'été ? 😊



### Breizh : dremmvro ha sevenadur

Ur valeadenn e Breizh  
a-raok an hañv a vo  
mat deoc'h ? 😊

## RETOUR EN IMAGES

## TAOL-SELL GANT SKEUDENNOÙ



**Médiathèque-ludothèque de Gourin**  
**Espace Dr Paul Lohéac**  
**13 rue Jacques Rodallec**  
**56110 Gourin**  
**02 97 23 62 43**  
**mediatheque@gourin.bzh**



#### **Horaires Euriou**

**Mardi Meurzh** 9:00-12:00 / 13:30-18:30  
**Mercredi Merc'her** 9:00-12:00 / 13:30-18:00  
**Jeudi Yaou** 13:30-17:30  
**Vendredi Gwener** 13:30-18:30  
**Samedi Sadorn** 9:00-12:00 / 13:30-17:00

Vous recevez ce message car vous êtes inscrit.e sur la liste de diffusion de la newsletter de la médiathèque-ludothèque de Gourin. Conformément à la loi "Informatique et libertés" ainsi qu'au Règlement Général pour la Protection des données (RGPD), vous disposez d'un droit d'accès, de rectification et de suppression des données concernant vos données personnelles. Vous pouvez exercer ce droit sur simple demande : en vous adressant à : [dpd@cdg56.fr](mailto:dpd@cdg56.fr). Par ailleurs, vous pouvez à tout moment vous désabonner de cette liste de diffusion en cliquant sur le lien "se désinscrire".